

AR GWIN-ARDANT

Gant YAN DRONIOU

(Ar son-man e eo bet kurunet ha moulet gant arc'hant roët da GEVREDIGEZ BRO-VREIZ gant hor c'hennroad THEODOR BOTREL, ar barz brudet).

KENTA LODEN

1

Silaout holl, Bretoned,
Tud yaouank ha c'hwi tud koz,
Eur ganaouen bet savet,
Eneb evach ar malloz.

Diskan

Pegen seder eo an den
Goude eva hini gwen
Eun, daou pe tri bigornad
A lak an den da lampat !

2

Selaout' ta, Kenvroiz
Eur Breton a Blounerin
Pehini gwechall, d'ar c'hiz,
Eve gwinn-ardant ha gwinn.

3

Ar gwinn-ardant ru ha gwen,
O ya zur, en gwirione
Lak an den da goll e ben
E gorf koulz hag e ine.

4

Ar gwinn-ardant zo poezon
Evidomp holl Bretoned
Vid hon skiant, vid hon rezon
Hag ive vid hon spered.

5

Ober a ra deuz tud fur
Diaoulien digoustianz,
Sujeded louz ha hudur :
Bezit' ta en distianz.

6

Ar gwinn-ardant zo ruzet !
Diwallit, tud a skiant,
Diwallit holl, mignonned,
Pe e tapo hoc'h arc'hant.

7

Dimeuz an « dour a vue »
Neus kemeret e hano,
Mez dre an hano brao-ze
Dre holl sko taol ar maro.

8

Ar gwinn-ardant, an treitour,
Zo zur eun « dour a varo » ;
Mar c'hell dre e komzou flour
D'an lfern zur hon kaso.

9

Zur mad eo ar gwinn-ardant
Me ho ped holl da gredi,
Zo groet gand dour-hao patant
Pini n'evle ket ma c'hi !

10

Groet e ve ive gant ju
Gant ju diwar goz tokou ;
Me gred a die beza dru
An hevelep evachou.

11

Ar boeson, ma c'hredet ferm,
A zo bet zur dislonket
Gant diaoulien an lfern
Vid ho taoni holl er bed.

12

Ar boesonion a zo groet
Euz a beb sort loustoni,
O ya zur, ha komprenet
Evid hon ampoezoni.

13

Gwinn-ardant, potred, merc'hed,
Ho laka war an hent fall
Ha vel eur bleiz dianket
Lak ac'hanoc'h da yudal.

14

An evachou fall ha louz
A lak merc'hed ha potred
Da zansal giz ar marinouz,
Vel tud kollet o spered.

15

Dre forz eva gwerennad
E teufet, ma c'housorted,
Da gavout eur poltred mad :
Eur fri louz ha kulotet !

16

Dizeren ra muzellou
Vid al lavariou noazus,
Drezhan rer ar gwall daoliou,
An taoliou muia spontus.

17

Sethu' ta kamaradou.
Ar vosen dre ar boeson :
Lakaat frika ar madou,
Koll ar spered, ar rezon !

EIL LODEN

1

P'an neus kollet ar mezhier
An doujanz hag ar rezon
E teu da veza muntre
Vel eur boureo digalon.

Diskan

Pegen traitour eo an den
A c'houlanter ar weren,
Efed ar werennado
Ra d'ezan skei d'ar maro !

2

An tad a sko dorn zerret
War e wreg, e vugale,
Bac'had, taoliou treid kaled
Alies pa n'eo bemde.

3

Dre ar boesson ar rouler
A lac'h ar re garet mad ;
Allaz, ouspenn ar mezhier
A renko c'hoaz kaout o gwad.

4

O c'has ra war zu ar be
A dreuz kalz a dourmanchou
Skei a ra a beb koste
Ha sethu kar an Ankou.

5

Ar rouler, ar roulerez,
Re oajet ha tud yaouank,
An eil egile, tud keaz
A grog evel ar zerpant.

6

N'holl everien unanet
N'int nemed torfetourien,
Vel diaoulou dichadennet
Hadont dre holl an anken.

7

Sethu aze, tudou kez.
Burzudou ar roulerien :
Trist meurbed eo ar vuez
Euz an holl boesonien.

8

Diskit eta, mignonned.
Penaoz droug ha fallentez
Zeu dre an evach daonet,
Dre rouler ha roulerez.

TEIRVED LODEN

1

Dilezomp holl, Bretonned,
An evach fall ha noazus
Ha ra vezo dispennet
An doue traitour Bacchus.

Diskan

An den zo evrus, lawen,
Pa na ev ken hini gwen ;
Kana ra a vuez skiltrus
Ha gant eur galon joaus.

2

An alkool, mignonned ker,
A zo eur boed a glenved
Hag eur vammenn a vizer,
Eul louzou vid al loened.

3

Evid kaout ar gwir vadou
Ar yec'hed, an eurusted,
Dilezomp an evachou
A vrema, potred, merc'hed.

4

Na lezomp ken hostizien,
Da ienna d'emp hon arc'hant,
Da dapout hon gwenneien
Gand ar poezon gwinn-ardant.

5

Lavaromp holl, Bretoned,
D'ar gwinn-ardant ru ha gwen
D'ho fallentez disprizet
Kenavo da virviken !

6

N'amzer da zond, kenvroiz,
Brezel ! Maro d'ar boeson !
Dre holl, dreist-holl barz en Breiz
Foci ha mez war ar poezon !

7

Kanomp stard, bezomp joaus,
Bretoned a Vreiz-lzel !
Kanomp gant eur vuez skiltrus
Ma zonik a vuez-uhel !

8

Ra vezo eta klevet
Dre holl hag intentet mad
Hag evel-se bezet-gret
Sethu c'hoant eur gwir Vreizad.